

Tud ar vro - Bro Leon
Roll kanaouennoù - Dañs round

Seizh lev ront

Seizh lev ront en tu all da Bariz, *O ge tronla traladara*
Seizh lev ront en tu all da Bariz, me a welas va c'habiten
Me a welas va c'habiten, me a welas va c'habiten

Mard eo te eo an den yaouank, *O ge tronla traladara*
Mard eo te eo an den yaouank, en deus kemend-all a vrud
En deus kemend-all a vrud, en deus kemend-all a vrud

Te a garje kaout ur goñje, *O ge tronla traladara*
Te a garje kaout ur goñje, da vont d'ar gear da welet da dud
Da vont d'ar gear da welet da dud, da vont d'ar gear da welet da dud

Nann, va c'habiten emezañ, *O ge tronla traladara*
Nann, va c'habiten emezañ, da vont d'ar gear me ned in ket
Da vont d'ar gear me ned in ket, da vont d'ar gear me ned in ket

Me ‘chomo ganeoc’h en ho rejimant, *O ge tronla traladara*
Me ‘chomo ganeoc’h en ho rejimant, keit ha ma viot kontant
Keit ha ma viot kontant, keit ha ma viot kontant

Me ‘m eus choazet ur verjelenn, *O ge tronla traladara*
Me ‘m eus choazet ur verjelenn, ha n’emañ-hi ket a bell-vro
Ha n’emañ-hi ket a bell-vro, ha n’emañ-hi ket a bell-vro

A zo ganti ur mouchouerig, *O ge tronla traladara*
A zo ganti ur mouchouerig, evit sec’hañ he daelouù
Evit sec’hañ he daelouù, evit sec’hañ he daelouù

- « Deboñjour deoc'h ta mestrezig, *O ge tronla traladara*
Deboñjour deoc'h ta mestrezig, gwall ho kavan kontristet
Gwall ho kavan kontristet, gwall ho kavan kontristet

Kavet din ho poan a galon, *O ge tronla traladara*
Kavet din ho poan a galon, peotramant a boan spered
Peotramant a boan spered, peotramant a boan spered

Me ‘glev an dud o lavaret, *O ge tronla traladara*
Me ‘glev an dud o lavaret, ez omp re vras mignonned
Ez omp re vras mignonned, ez omp re vras mignonned

Laoskomp an dud da lavaret, *O ge tronla traladara*
Ni n’omp ket re vras mignonned, ni a vez o eureujet
Ni a vez o eureujet, ni a vez o eureujet »